



Berr-ha-berr



Degemeret e vez bugale e staj KEAV : graet e vez war-dro bugale perzhidi ar staj e-pad ar c'hentelioù.

Adalek 6 vloaz e vez degemeret ar vugale en ur greizenn-dudi a reomp «KEAV evit ar vugale» diouti.

Digor eo ar greizenn-dudi adalek 9^e betek 5^e evit an obererezhioù gant un diwallerezh adalek 9^e-1/4 ha betek 5e 1/4 d'an abardaez, eus al Lun betek ar Gwener.

D'ar Sul kentañ e c'hall bezañ degemeret ar vugale adalek 2^e g.k. betek 8^e diouzh an abardaez ha d'ar Sadorn diwezhañ adalek 9^e betek 3^e g.k.

E mare ar pred kreisteiz e chom ar vugale dindan giriegezh ar «greizenn» evit ma'z afent war-raok gant ar brezhoneg ouzh taol hag evit krouiñ ur spered a-stroll etre ar vugale hag etre ar vuhezourien hag ar vugale. Da goan e c'hall ar vugale bezañ gant o zud da lakaat e pleustr ar pezh a zo bet desket ganto.

Darempredoù



KEAV : titouroù hollek, enskrivadurioù
keav@keav.bzh

22 hent Mouliouen – 29000 Kemper
 02 98 95 59 31/ 06 95 03 60 96 /

KEAV evit ar vugale ha KEAV evit ar grennarded (titouroù, paperioù da zegas)

kenurzhier@keav.bzh / 06 06 45 85 08



Ar raktres



Degemer ar vugale asambles gant o zud evit kreñvaat al liammoù e brezhoneg en tiegezh a zo unan ouzh palioù KEAV.

Kinniget e vo obererezhioù liesseurt a gloto gant oad ar vugale.

Kampoù bihan, div nozvezh anezho, a vo kinniget d'ar vugale adalek 9 bloaz. Div nozvezh a dremenint dindan deltennoù.

Hervez an niver a vugale e vo daou pe dri rummad bugale heñchet gant buhezourien stummet.

Pep tra a vo kaset en-dro e brezhoneg penn-da-benn.

Eus 9 eur mintin da 5 eur d'an abardaez e vo skipailh « KEAV evit ar vugale » e-karg er greizenn (prantad merenn ivez) .

Dindan giriegezh o zud e vo ar vugale ar peurrest eus an devezh ha pep hini a sento evel-just ouzh reolenn KEAV : « pep tra e brezhoneg » !

Aozet e vo an devezhioù ha kinniget an obererezhioù diouzh an tri fal pennañ :

- doujañ ouzh lusk ar vugale ;
- diorren an emrenerezh ;
- pinvidikaat an daremprediñ.



Hag ouzhpenn



Kampiñ

Sizhun 1 : bugale eus 6 da 13 bloaz

ha **Sizhun 2** : bugale eus 6 da 15 vloaz

Ar re vrasañ a yelo da Bloeven da gampiñ e-pad daou zevezh ha div nozvezh. Kinniget e vo a bep seurt obererezhioù dezho (sportoù ha land art war an aod...). Kaset e vint di gant tud ar greizenn, un tamm sikour a vo goulennet digant tud ar vugale d'ur mare bennak. Kinniget e vo d'ar vugale adalek 9 bloaz.

D'ar re vihanañ e vo kinniget dezho un nozvezh kampiñ e Ploeven (ne vo ket ret), o zud a c'hallo dont da gousket di ivez an nozvezh-se.

Dafar da zegas evit pep bugel :

ur sac'h-kousket, un deltenn ma'z eo posupl, un tok, lunedoù-heol, botoù bale, ul lamp godel

Hag er memes mare

Ar grennarded adalek ar 4re klas betek ar c'hlas termen a vo degemeret e-pad ar sizhun gentañ er gevrenn « KEAV evit ar grennarded, Yezh ha Dudi ».

Ar vugale dindan 6 vloaz gant tadig pe mammig a vo degemeret en eil sizhun er rummad « Brezhoneg er familhoù ».

Priz ar staj :

Bugale kentañ derez, skolajidi, liseidi : an hanter eus priz an dud gour ;

Priz an dud gour: 280€/studierien amzer-leun ha tud dilabour 240€ . Un distaol a vo graet adalek an eil bugel ar familh hag evit ar vugale o chom e Penn-ar-Bed, gant sikour Kuzul-Departamant 29.